

H. Pennarun (Hervé Nicolas) (Landrevarzeg 1871 –Kemper 1919)

Modernnaet eo bet an daore-skriva.

Taolenn

Tinig troh-yalh

Ren ar werenn

Daou vignon braz

Ar butun marmouz

Mouez eur galon vrevet

Beza mezo

Tinig troh-yalh

War eun ton nevez

« Selaouit, eme an ostiz,
Unneg eur 'zon 'barz an iliz :
Poent eo, paotred, mond en ho tro,
Warhoaz 'darre ni 'n em gavo. »

'Vel-se e lavaras an den-ma'
D'an dilerheien, diweza
En eur zerra dimeuz o fri
Dor ledan an ostaliri.

Ha meulet en-devoa e walh
Keid ma oa bet arhant 'n o yalh,
'Vid o lakaad bremañ er mêz
Mar ve red a-daoliou boutez.

Talvezoud 'ra dezañ dale
Moned da gousked d'e wele ;
Hogen, a-raog-se en-deus c'hoant
Ha gonta e dammig arhant .

« Sed amañ 'ta », eme Tinig
D'an ostizez e goustadig,
« Sell pegement 'zo anezo,
Greet on-deus devez maf hirio !

Ar gwin-ardant en-deuz redet
War an daol-gont 'giz 'oa gleet ;
Ne oa mui banne ken bremañ
N'ez 'm-eus badezet anezañ. »

« Mad e-teus greet », eme houma'
N'out ket da zeski e pep tra,
Te 'oa gwalha an dud vezo
En eur ober vad evito.

Hogen, me 'oar an daill ivez
Da drei dezo yod da grampouez,
Ha d'o derhel e-barz va zi
Ken defont gwenneg ebed mui.

N'm-esu ket va farez 'vid diskenn
An ampoezon en o gwerenn,
Ha pa 'n em lakaan, 'ven¹ ket pell
'Vid riñsad dezo o godell. »

¹ ven vezan.

« Ha me, 'me ar paotr marchosi,
Me 'oar labourd evel tri ;
Ha feiz din-me, ne gollan ket
Va foan, va amzer, na va boued.

Red 've va gweled er marhad
O tastum ar *pratikou* mad,
H tenna war o chupennou
Evid dond da baea banneou. »

« Ha me, eme Soazig ar Rouz,
Plahig friant ha dibikouz,
Me 'oar degas paotred yaouank
D'ho ti kement 'vel 'm-efe c'hoant.

N' 'm-eus nemed mond war an treuzou
Da ober eun tammig neuziou,
Rak tal e teuont 'n eur vandenn
D'am heul da dal ar varrikenn. »

« Gouzoud a reom, 'me an ostiz,
Penaos ez oh daou zen a briz ;
'Peus nemed kenderhel bepred,
N' 'gresko deoh ho koumaned² .»

*

Antronoz vintin, pa glevas
E oa maro Jakez Tigwaz
'Tond euz e di gand re govad,
An ostiz 'lavare timad :

« Doue dezañ a bardono ;
Eun digoll braz e-barz er vro ;
Peurlipet deuz kement en-doa
A-raog moned euz ar bed-ma'.

Setu aze tud diaviz,
Pe stad a ra ouzoh an ostiz,
Ha c'hoaz ra vad deoh mond d'e di
Gand hast da 'n em ampoezoni.

² koumaned : koumanant (evid ar rim)

Ren ar werenn

War don / Merhed Keraez.

Ar pezh or ren war an douar,
'R pezh 'ra ganeom e-giz ma kar,
Ar pezh 'ouarn bremañ ar bed
N'eo na Doue, na den ebed,
N'eo na lezenn, na gourhemenn :
'R pezh a ouarn eo ar werenn !

Ma klever a-wechou embann
E vez kollet e zaout gand Yann,
Ma ya a-bell evid o hlask,
Hag int er gêr stag ouz o nask,
Ma wel e' du 'r pezh 'zo gwenn ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Ma oa meur a wreg-tiegez
Trei he amann, he viou, he lêz
E gwin-ardant, ha dond d'ar gêr
Euz ar marhad didavañcher ;
Ma lavar goude 'deus droug-penn ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Ma chom an ozah 'n e wele
Beb lun vintin bete kreiz-te',
Ma tap a-wechou krog-ar-yod
Pa houlen dour pe lêz-ribot
Da zsitana e hourlañchenn ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Ma ya nadoz ar hemener
Gwelloh 'n e fri 'vid er mezer,
Ma stag an tamm 'kichenn an toull,
Ma ema riboul-diriboul
O vond hag o tond war e dorchenn ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Ma kren daouarn ar micherour,
Ma vez ken aliez dilabour,
Ma rank e wreg mond d'e gerhad
Euz an davarn ken diwehad,
Daosut ha ma sko ganti ouspenn ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Ma n'eus mui tan en oaled,
Na tamm bara war an daol-voued ;
Ma varv e wreg, e vugale

War deon³ plouz yen o gwele,
Gand ar baourentez, an ken ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Mar ya kement da glask bara
Goude beza bet peadra,
Ma ruill ar pinvidig er poull,
Ma werz ar paour ar bragou toull,
En-deve bet en aluzenn ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Mar vez trouz etre daou bried
Hanternoz devez o eured,
Ma sko ar bugel gand ar vamm
A ra dezañ he gwella tamm
En desped d'he oad, d'he bleo gwenn ;
Petra 'zo kaoz 'med ar werenn ?

Mar deu an den da 'n em lezel
Heb mez da ziskenn izel,
Mar zo⁴ mil boan e-leh unan,
Mil displijadur er bed mañ,
Mizer da galz 'leiz o hrohenn ;
N'eus netra kaoz 'med ar werenn !

³ deon : deun.

⁴ Mar zo : mar ez eus

Daou vignon braz

An Ankou hag an Diaoul oh ober an evaj kreñv

War eun ton nevez.

Eun devez, bremañ 'zo pellig,
An Ankou, goullou e garrig,
En em gavas digand Satan
O redeg bro evel dezañ.

« Hag a-nevez, eme Paol-goz,
Penaos e ya ar bed fenez ?
Nebet ez out, a lavarfen
Pa stouez ken izel da benn ! »

« Setu aze, 'me an Ankou,
An dud digand o skiantchou
Hag o gouiziegez 'zeu brema'
Bepred diêsoh da baka !

Gwechall, digand eur hwezhadenn,
Me 'lake brezel ha bosenn,
Breah⁵ ha kernez dre ar hêriou
Ha hije tud a-strolladou !

Hirio, gand ar vedisined
Hag o louzeier milliget,
Dibaot a gleñved e ouezan
Na ve kavet louzou dezañ !

Kaer 'm-eus redeg d'ar broiou pell,
Mond ha dond digand an avel,
Ober kant leo e-leh unan,
Nebeudig ar re a bakan !

Breamig zoken 'vezin gwelet
'Stleja dre bevar horn ar bed
Va zammig eskernigou kraz
Hag eur falh verglet war va skoaz !

Koulz lavared den ne varvo,
Ha Doue, kerkent ma klevo
Euz uhelder e Varadoz,
An daolo warnon e Valloz !

Med an hini⁶ en-doa laket

⁵ Breah ? Breh-du.

⁶ an hini : pehini, er skrid orin.

Da vestr war gement 'doa krouet,
Gand urz da lemel o buhez
Digand an oll dud heb truez. »

Hag ar paour-kêz Ankou a oa
Nebet 'vel ma hello beza ;
Kaer 'doa furchal 'n e damm spered,
Ne gave mui kleñved ebed.

« Farser avad, eme Paolig,
Euz e weled ken reuzeudig ;
N'eo ket 'n eur hweza en avel
Lakefot an dud da vervel !

Deus ganin-me bete va zi,
'Zo du-hont pell euz pep hini,
Ha me raio dit peadra
D'o lakaad da goll 'r c'hoant bara !

« Klevet am-eus avad, kompaer,
Penaos te a zo desket kaer,
Ha ne zisplij ket din moned
Beteg da di evid gweled. »

N'en-devoa ker peurlavaret
E gomz, hag e oan erruet
E-barz ti an Aotrou Satan,
A oa digor frank ha ledan.

Ha ker buan an Droug-Eal⁷
'Zastum an oll louzeier fall
'N eur pod-houarn, evel d'eur forn,
Tan braz dindannañ e pep korn.

Eur vokedenn fall a zave
Diwarnezo, ken a varve
Oll kement 'oa e-barz ar vro,
Ouspenn tri-hant leo tro-war-dro !

En-dro d'ar pod, forz boutaillou
'Oa 'distribill euz pluennou,
'Vid dastum sun al louzeier
A zerede enno gand herr.

War ar boutaillou 'oa skrivet
E lizerennou braz-meurbed :
Cognac, Vermouth, Absinth, Tafia
Rhum, Gwin-ardant, et cetera...

⁷ Eal : Êl.

An Ankou, kerkent m'o gwelas,
A-grezi e galon a dridas ;
Hag ar wech-mañ en-doa kavet
Ar pezh en-doa kement klasket.

*An oll dechou, an oll vizou,
An oll draou fall, an oll boaniou,
Ar maro 'vel an naer-wiber
Kuzet dindan anaoiou kaer !*

Ar butun marmouz

War an ton a garer

Euz a bep tu n'eus 'med eur vouez :
An dud 'ya war falla bemdez ;
Ma kendalhom c'hoaz da ziskenn
Bremaig 'vezo kollet or gouenn !

Penaoz ? or gouen a ziskennfe
A lammou braz war-zu ar be' ?
Koulskoude bugale brema'
'N em gav gwazed euz ar gwella !

Ya, ha gwazed ! ma n'em gredez
Deus da weled hag e welfes :
Gwazed ha n'e' ket korriged
'Vel re an amzer dremenet.

Sellit outo 'barz ar foariou,
Ha war dachenn ar pardonioù,
Pebez neuz ha pebez doare
O-deus bremañ or bugale !

Peadra a ve da hoarzin
O weled dremm iskiz o min
Kuzet drein pod eur horn-butun
Na weler penn-fri da nikun.

Rag n'o-deus greet c'hoaz 'med diskenn
Nemed riska diwar 'r varlenn
Hag e voged o zamm genou
Evel da goz siminaliou.

Ne dint c'hoaz nemed marmouzien
Ha koulskoude gwella 'kaven
Eo 'barz 'n eun ostaleri,
Eur werenn 'sribill euz o fri.

N'o-deus ket diou raouenn-vragou⁸,
N'int nemed beg hag ivinou,
Hag e evont hag e fumont
Pep hini evel da dregont.

Ha c'hoaz zo⁹ tud hag a lavar
Ema or gouenn 'vond war ziskar !
Ha c'hoaz zo tud hag a gred

⁸ raouenn-vragou : ?

⁹ zo : tregerieg : ez eus.

E teuy dre aze fin ar bed !

Hogen avad, 'barz er bed-ma'
An traou 'ya bepred war wella,
Ha bugale 'r re-mañ d'o zro
'Vo c'hoaz kalz gwelloh evito.

Gand gwad o zud en o gwazied
Ar re-mañ rag ma vent ganet
En em gavo paotred dispar
'Vel na vez ket war an douar.

Ne zenfont 'med 'n eur gredi sun
E-leh ar vronn, ar horn-butun,
Ha ne evfont biskoaz banne
'Med 'n eur gredi ve hini kreñv.

Mouez eur galon vrevet

War don : Paotred Plouillo.

Kenavo dit¹⁰, ma haredig,
Kenavo da virviken,
Brevet e-teus ma halonig
Gand ar glahar, an anken ;
Koulskoude ar gwas 'm-eus greet
A-viskoaz en da geñver,
Ëo da veza da re garet
Gand eur galon re dener !

Nag a-vuan 'teus dizoñjet
An amzeriou ma vije
Da zaouarnigou flour stardet
Ken aliez 'barz ma re,
Or zelligou¹¹ o 'n em groaza
Digand kemend a eurvad,
Ha ma skeudennig o para
E-barz mabig da lagad.

Me da wel c'hoaz o teredeg
Ken evruz d'am diarbenn,
Da zivrehigou karanteg
Stardet en-dro d'am herhenn,
Ar pokigou¹² o tinijal
Diwar da vuzelligou¹³,
Ar garantez oh huñvreal
E goueled or halonou.

Lavaret e-poa din neuze
'Spenn kant gwech e-leh unan
Ne garjoh de nemed nemedon-me
Keid ma vit¹⁴ war ar bed-mañ,
Ha me, 'kredi da le¹⁵ gwirion,
'N em ouestlas ivez d'am zro
D'ho karoud a-greiz ma halon
Tre beteg eur va maro !

Mez ar fealded n'ema ket
He falez war an douar
Nag ar garantez wriziennet
Er halonou a 'n em gar :
Bez' eus outo evel ma vez

¹⁰ Kenavo dit : galleg.

¹¹ zelligou : zellouigou.

¹² pokigou : pokouigou.

¹³ vuzelligou : vuzellouigou.

¹⁴ vit : vezoh

¹⁵ da le : kemmeska a ra **te** ha **c'hwi**.

Demeuz ar homzou kaerra,
Ar re denerra aliez
A dremen ar buanna !

Rag bremaig e vo pevar miz
Ha kaer 'm-eus mond ha doned
Dre gement leh e tremenis
Ne hellan mui da weled,
Ne glevan mui da vouez sklinton,
Da hoarzig dous ha seder,
Rag tehet e-teus diouzin
Dre guz hag evel eul laer.

Tebet e-teus evel ma teh
Ar goulm dimeuz he neizig
Heb ma hellan goud da beleh
'Teus kaset da galonig :
Tebet e-teus, ha 'r pezh 'zo gwaz
Ne ouzan ket 'vid petra.
Rag va dilezet 'teus siwaz
Pa da garan ar muia¹⁶ !

Da betra 'talv din-me brema'
Gweled an heol o skedi,
Kleved an evned o kana
Digand kement a zudi,
Pa guz ouzin ar sklêrijenn
A lare warnon eun de',
Pa eo tavet ar ganaouenn
A vouskane em ene.

Petra 'dalv bremañ da Zoue
Hada bmeun 'leiz ar parkou,
Lakaad deliou glaz 'barz ar gwe',
Disheol dindan ar brankou ;
'Vo mui 'vidon war an douar
Peoh na frealzidigez,
Ne vo nemed keuz ar glahar,
Poan, ranngalon hag enkreuz !

Va oll buhez ne vezo mui
Nemed eun nozvez teñval,
Eun nozvez hir 'pad an hini¹⁷
N'em-bo netra da hedall,
Netra da hedall, da hortoz,
'Med da weled c'hoaz eun de'
'N eur hornig deuz ar Baradoz
E-mesk êligou¹⁸ Doue.

¹⁶ Pa da garan ar muia : galleg : Pa garan ahanout ar muia.

¹⁷ an hini : pehini, er skrid orin.

Kenavo 'ta ha pa'z eo red,
Kenavo c'hoaz, kenavo ;
En desped dit te 'vo bepred
An hini 'garin atao.
Te 'hello va nah, ha siwaz !
Va hasad, va disprizoud :
Eun dra 'zo ha n'hellfet biskoaz :
Mired ouzin d'ho karoud !

Beza mezo

War eun ton nevez.

Beza mezo : petra eo se ?
Kalz n'ouzont ket, e gwirione',
 Siwaz dezo !
Euz petra 'vent¹⁹ an heñvella,
Da be loen 'tennont ar muia
 Pa vent mezo !

Rag al loened p'o-deus evet
A-walh 'vid terri o zehed
 A oar ehan ;
E-leh an den, lontreg, diboell,
A oar eva keit ha ma hell
 Derhel gantañ.

Beza mezo, 'n em gaoud eun den,
Ha hinnoal 'vel eun azen :
 Kredi beza
Furra den 've war an douar,
Ha nerzuz evel da bevar
 Pa ve koueza.

'N em veuzi ha beza e skiant
Hag e spered er gwin-ardant !
 En eur ober
Eur hargouer euz e henou,
Eur varrikenn euz e vouzellou !
 Beh d'e ler !

Chom evel ar gelaouenned²⁰
Heb dispegi ken ve tarzet ;
 Evel dezo,
Suna gwad, yehed ha buhe'
E bried hag e vugale
 Hep truez outo !

Beza mezo ; koll e vrud vad
Ha dond da vleiz euz a zañvad,
 Beza diroll :
'N em blijoud o veza goapaet,
'N em zisprizoud, be'²¹ disprizet
 Digand an oll !

Eurhad ha turgnad 'vel ar moh

¹⁹ 'vent : vezont.

²⁰ ar gelaouenned : ?

²¹ be' : beza.

Ha mond ganto, va respet deoh,
E kein ouz kein,
Evel breudeur da 'n em leda,
Ha 'n em ruilla, da 'n em zaotra
Er poullou brein ?

O ! ma ouezfe ! ma komprenfe
An den petra eo eva re !
Ehanfe krenn ;
Ne ve neemd dre garantez
Evitañ, evid e lignez,
Evid ar ouenn !

Ne ve ken nemed 'vid mired
Pell goude ma vo tremenet,
Euz e ano
Da veza taolet heb doujañs
Evel eur vez, eun dismegañs
'Mesk tud e vro.